

AR WERENN

Ar pezh a ren war an douar
Ar pezh a ra ganémp evel ma kar
Ar pezh a ouarn bremañ ar bed
N'eo na doue na den ebed
N'eo na lesenn na gourc'hemenn
Ar pezh a ouarn eo ar werenn

Ma oar meur d'a wreg tiegezh
Treiñ héh amann, hé viow, hé lêzh
Ar gwin ardant ha dont t'ar gêr
Deus ar marc'had didavañjer
Ma lavar goude a zroug penn
Petra zo kês 'med ar werenn

Mar 'ha nadô ar c'hemener
Gwelloc'h 'n é fri 'wid ér mezher
Ma stag an tamm 'kichen an toull
Ma vê riboul ha diriboul
O hont, o tont war an dorchenn
Petra 'zo kês 'med ar werenn

Mar choman é-barzh ma gwele
Beb lun vitin bteg kreisté
Ma dapan krog ba pod ar yod
Ma c'houllan dour pe lêzh ribod
Da zistanañ ma gourlañchenn
Petra 'zo kês 'med ar werenn

LE VERRE

*Ce qui règne sur terre
Ce qui fait de nous ce qu'il veut
Ce qui gouverne désormais le monde
Ce n'est ni dieu ni homme
Ce n'est ni loi ni commandement
Ce qui gouverne, c'est le verre*

*Si plus d'une fermière sait
Faire tourner son beurre, ses œufs, son lait
De l'eau-de-vie et, rentrant à la maison
Du marché sans tablier,
Si elle crie ensuite à tue-tête
Qu'en est la cause si ce n'est le verre*

*Si l'aiguille du tailleur
Va plutôt dans son nez que dans l'étoffe
S'il assemble la pièce à côté du trou
S'il ne cesse de gigoter
Allant et venant sur son coussin
Qu'en est la cause si ce n'est le verre*

*Si je reste dans mon lit
Tous les lundis jusqu'à midi
Si j'attrape le pot à bouillie
Si je demande de l'eau ou du lait « ribot »
Pour rafraîchir ma gorge
Qu'en est la cause si ce n'est le verre*